

Llydaweg / Breton

Kemmenadur a beoc'h hag a volontez vat digant yaouankiz Kembre da yaouankiz all tro-dro ar bed

Kemm an hin? War piv emañ ar bec'h? Warnomp-ni...

Piv zo kiriek eus ar c'hudennoù? Ni eo! Ni eo a zo o saotrañ ar bed.

Ha katus e kavit sellout ouzh ar c'heleier? Hag aet oc'h skuizh o welout skeudennoù eus an dour-beuz, eus ar c'horventennoù hag eus gwalleurioù all, a bep seurt, tro-dro ar bed?

Deoc'h eo da choaz - etre ar vuhez hag ar marv. Skoazellit ac'hanomp da sevel un dazont gwelloc'h.

Pep kammedig a c'hall ober un diforc'h. Nebeutoc'h a dredan a c'hallomp implijout, espern an dour, adaozañ, adimplij, ha harpañ an aluzennoù.

Ret eo deomp bezañ e karg. Ret eo deomp strivañ da zirouestlañ ar gudenn.

Pedet eo yaouankiz ar bed da gejañ ganeomp, tud yaouank Kembre, a-benn klask sevel un dazont bravoc'h. Un dazont glas. Un dazont diogel. Asambles e c'hallomp herzel ouzh tommadur ar bed. Ret eo deomp oberiañ bremañ.

Kemm an hin: War piv emañ ar bec'h? Warnomp-ni...

Savet gant Skol Plasmawr ha Skol Fitzalan